

# KANTIK

## ITRON VARIA AR MERZER

E ILIZ AR MERZER

*(Eskopti Kempet)*

Ton : *Eun Doue a zeu d'ho kervel*

(Voir cantiques bretons notés p. 9, n° 16).

### DISKAN

Itron Varia ar Merzer  
 Divar ho tron benniget  
 Var-n-omp beillit e pep amzer.  
 A zroug hor mirit bepred.

1  
 Guerc'hez, dre bevar c'horn ar bed,  
 Ra vo meulet hoc'h hano !  
 En hoc'h iliz kaer daoulinet  
 A greis kalon ni 'gano.

2  
 Savel var eun tron ken huel  
 Er gloar euz ar barados,  
 Euz an eurusdet eternal  
 Ho krassou ni a c'hortos.

3  
 Hirio, varc'hoas lia da viken  
 (Ha zoken betek mervel,] !!  
 D'eoc'h e tigassimp hor peden,  
 D'eoc'h e vimp ato fidel.

4  
 Pa 'z 'oc'h d'eomp guir alvokadez,  
 Ni pec'herien kaledet  
 A fizio var ho trugarez,  
 'N han' Doue hor zikouret !

Guechal en iliz santel-man  
Hon tadou koz a bede.  
Ha ni ho bugale vihan  
Gant joa a bedo ive.

Pa vo ar vam baour ankenniet,  
Daou-bleget var he bugel,  
D'ezhan digassit ar iec'het.  
Mirit ount-han da vervel !

E kalonou hor bugale,  
'Ve c'hoant ober pañanet,  
Lakit doun karantez Doue,  
Mam d'ezho bezit bepred !

Hor mortoloded e danger.  
Goude pedi, labourat,  
Ouz Itron Varia 'r Merzer  
A en em erbed dalc'h-mad.

D'ar zoudard ha d'ar mortolod,  
Pell d'euz he vam hag he dad,  
Aliez en anken, ra viffot  
An Itron a gelou-mad !

D'an den koz koulz ha d'ar c'hlanvour,  
D'ar re 'zo ep mam na tad,  
D'ezho oll digassit sikour !  
Deut bepred d'ho laouennat !

Da gement a zo en enkreuz,  
D'ar re o deuz kalounat,  
Digassit laouennedigez  
Oh ! digassit kelou mad.

En eur ger d'ho servicherien,  
D'an dud a volonteiz vad  
Grit ato eur vizach laouen.  
Ni 'deui d'ho trugarekat.

Ouz ar Frans, an Iliz santel  
Grit eur zell a drugarez,  
Ha var an anaon fidel  
Skuillit hoc'h oll madelez.

Mari, o Guerc'hez galloudus.  
Ouz-omp-ni oll Merzeris  
Bezit bepred madelezus  
P'ho pedimp en hoc'h iliz.

D'eoc'h-hu ha d'ar Mabik Jezus  
Koulz ha da zant Salomon  
Bepred e tigassimp joiaus  
Hor peden a greis kalon.

Ha pa 'z'eu an heur da guittat  
An draouien-man a zaelou,  
Oh ! digassit d'eomp sikour vad !  
Ra 'z'affemp oll d'an envou.

IMPRIMATUR

Quimper, le 9 Juin 1895.

E. FLÉITER

V. G.

# EUR GER BENNAG

## DIVAR BENN ILIZ AR MERZER



### I.

#### *Sant Salomon. — He relegou*

Ervez lavarou ar re goz, korf sant Salomon, Duk, pe ma kavit guelloc'h, Roue Breiz-Izel, ha sant patron iliz ar Merzer, a zo bed interret dindan an aoter vraz.

Iliz ar merzer, ouspen ma 'z'eo braz ha frank, a zo c'hoas unan euz ar c'haera ilizou a zo er vro. Hiritourien an Dukez Anna, da lavaret eo Rouanez Frans, n'o deuz ket ankounac'heat an iliz a loj hag a vir relegou Roue koz Breiz-Izel, sant Salomon, patron karet hor parrez. Meuleudi d'hor Rouanez koz ha peoc'h Doue var ho eneou.

### II.

#### *Eul loden breman, euz an traou kaer hag a briz, a zo e iliz ar Merzer*

1° EUR ZAKRAMANT ALAOURET. — Hema a zo euz ar c'hiz koz. Evel-se eo braz dreist-oll hag euz ar zeurt ne veler nemet en ilizou katedral.

2° IMACH AR MABIK JEZUS. — An imach-ma a zo eur pezh labour koant ; oll e ma en arc'hant ; great eo er blavez 1667.

N.-B. — Imach ar Mabik Jezus a vez douget, gant potret iaouank, e prosession. d'an eil sul euz pep miz evit gousperou, ha neuze e vez kanet *Litanion Breuriez ar Mabik Jezus*,

3<sup>o</sup> VOEST ARC'HANT AR RELEGOÙ. — Ar voest-se a zo labourer kaer, kizellet hag evel dantelezer ; beza eo eur pezh labour euz ar seurt a zo rouez da velet. Ar voest-se a zo braz hag e deuz furm eur japel gant eun dourel e kreiz an doen pe ar golo. Tro ha tro da voest ar relegou e ma imachou an 12 abostol. Huelloc'h e vejer imach Itron Varia ar Merzer hag hini sant Avertin.

An dud guissiek ne skuizont ket o sellet ouz ar pezh labourer kaer-ze.

N.-B. — Da gever foar vraz ar Merzer (eil lun a viz gouere), imach ar Mabik Jezus, koulz ha voest ar relegou, a vez lakeat en iliz parrez a vel d'an oll, ha dira-z-ho ez ear da zaoulina ha da ober eur beden.

### III.

#### *Pardounnion ar Merzer*

Bep bloas e vez daou bardoun er Merzer :

1<sup>o</sup> Ar pardoun kenta a vez d'an eil sul a viz mae ;

2<sup>o</sup> Ar pardoun braz a vez ato d'ar zul araog an eil lun a viz gouere.

Foar vraz ar Merzer (ar genta euz ar vro), a vez ato d'an eil lun a viz gouere ; padout a ra daou zervez, hag ar pardoun braz a vez ato derc'hent ar foar-ze.

Pardounnerien, trafikerien, marc'hadourien, en deichou-ze, na ankounac'hait ket da zigas d'an iliz eur beden da Itron Varia ar Merzer.

*Itron Varia ar Merzer, Mabik Jezus ha sant Salomon, pedit evid-omp.*

F.

10 a viz Eben 1895.